

Morvan Goulven (Ar Forest-Landerne 1819 – Timadeg 1891)

Modernnaet eo bet an doare skriva. Faziou kemmaduriou ha reiz anoiou-kadarn a zo.
Viou-koukoug ‘zo ivez.

Argad Aberwrah. Bet embannet e 1916.

Argad Aberwrah

1486

Kenta kan

AR HANNAD

I

Etre Bro-Zaoz ha Breiz-Izel
Ez deus bet er bloaz ‘mañ brezel ;
Eur stourmad berr, mez kriz ha tenn,
Ruziet gand ar gwad an dachenn.
Ar Zaoz daoust d’e zislealded,
A zo bet adarre kannet ;
Ranket en-deus tehed buan,
E Breiz n’eus ket chomet unan.
Marheien Vro-Zaoz a-bell zo
A ra fallagriez dre ‘r vro ;
Skrij eo komz euz o zorfejou
Kiriég da gement a zaelou ;
N’ez eus¹ kristen na kristenez
A oufe² bale dienkrez,
Ken na hell mui an Arvoriz
Gouzañv eur maherez ker kriz.

A-berz an Duk³ euz an Naoned
Eur hannadour a zo kaset
Gand urz da gemenn d’an estren
Mond war eur zao d’o enezenn.
« It, eme ‘r hannad d’ar Zaozon,
It d’ho pro, treuzit ar mor don,
Riñsit da vad bro Vreiz-Izel,
Pe raktal ho-pezo brezel,
Brezel ho-po, brezel garo,
Brezel ahann bete ‘r maro ;
Birviken mui n’ho-pezo peoh,
An Arvoriz hen tou deoh. »

Ar Zaoz ne ree nemed goapaad

¹ N’ez eus : Ne deus, er skrid orin.

² oufe : ouezfe.

³ an Duk : Frañsez II

Ar hannadour hag e gannad :
« Ne daim ket ahann d'ar vro all
Evid kleved chas oh harzal ;
A-barz ma treuzim-ni ar mor,
E vo rouez an dud en Arvor. »

D'an trede a viz Gwengolo
Ar stourmad braz a zigoro,
Da zao-heol e mêz Sant Anton
Etre 'n Arvor hag ar Zaozon.

II

E Joaiuz-Gward⁴ petra a-nevez
Ma'z eus kemend a levenez,
Ma kolver ar herniel gwinal⁵
Hag ar herbiel boud o voudal,
Ha trompillou ken na dregern
Koad ha kastell ar Penntiern ?

Euz a bevar horn Breiz-Izel
Eus deut⁶ marheien d'ar hastell
Da gerhad an Aotrou Rohan
A zo penntiern an emgann.
Setu displeget ar banniel
Ha stag e beg an tour uhel,
Ha warhoaz e penn ar vandenn
E vleinio an argaderien.
Me 'wel marheien daou-ha-daou,
War al leton gand o goafou.
Oh ober neuz d'en em daga
A-raog mond er Zaoz da bega.
Me 'wel an argadourien
O vale war roz ar grehenn :
Diskennet zo⁷ eul lodenn all
War riz an aod da ebat ;
Darn anezo 'ya da hoari
Darn all a ya d'en em walhi.

Markiz Brezal ivez 'zo eat⁸
D'an aod da gemered ebat :
Hogen p'en-deus gwelet diou vag
Oh eur haf dero eno stag,
E galon a zo faziet
Gand keuz d'e floh, muia-karet,
Gand keuz d'e flohig, d'e niz ker
Beuzet tri bloaz 'zo 'kreiz ar ster ;

⁴ Joaiuz-Gward : ano eul leh.

⁵ ar herniel gwinal : bet skrivet "guinal" er skrid orin, ha troet e galleg "kerniel brezel"

⁶ Eus deut : 'Z eus deut

⁷ zo : tregerieg : 'z eus.

⁸ eat : eet (leoneg, evid ar rim).

Hag eñ d'ar hastell gand anken,
Bete 'n noz 'oe teñval e benn.

III

Ya, Yannig Lann, an neun⁹-ze
A oe kirieg d'az maro-te !
P'edos o tond euz a Vrezal
Ken lijer hag eun Dremedal¹⁰.
Ne zoñjes ket, a dra serten
Ne dajes en-dro birviken !
Piou 'lavarje oh da weled
Ken drant o fringal, o lammed,
O vond d'an aod da ebatall
Edo 'n ankou oh da hedall ?

Duk Rohan, e penn ar vandenn,
'Oa azezet war eur voundenn,
Hag oll dudjantil ar harter
A oa en e geñver.
Ha d'ar flohed e lavaras
P'o gwel o vragal war an treaz¹¹ :
« Pehini ahanoh 'zo gouest-mad,
Da dreuzi 'r ster en eur pennad ?
Gweled a rit-hu e Kerne
Eul liorz leun a wez-froue'
Hag e-kreiz euz ar wezenn-ze
E vezo greet Marheg emberr
Amañ diohtu war ribl ar ster. »
Ha Yannig Lann an eskuita
A ouie neun ivez gwella,
A-veh edo 'r re all er ster
P'edo Yannig er wezenn-ber.
Eur skourrig gwezenn a dorras
A oa ennañ c'hweh perenn vraz,
Ha gand e henou hen dalhe.
Ar ster en-dro dre ma treuze
War-dro 'n hanter p-oa erruet
'Krogas ar hlaz en e vorzed ;
Hag eñ leskel eur youhadenn
Ha sevel e vreh hag e benn,
E vreh a oa outi staget
Eur groaz aour hag eur chapeled
En-devoa bet digand e vamm
Pa'z eas da Vrezal yaouank-flamm ;
Raktal d'ar goueled ez eas
Ha pelloh goude ne zavas.

⁹ neun : an neunvial, an nañvial.

¹⁰ Dremedal : jao-red, hervez an droidigez e galleg.

¹¹ treaz : trêz : leoneg, evid ar rim.

An Duk Rohan gand e anken
A zao buan diwar e voundenn
Hag a gri forz, strafuillet oll ;
Ema Yannig o vond da goll !
Saveteit hen, me ho ped,
Ho poan ne vezo ket kollet.
An dudjantil oll a ouele,
Hag ar flohed keiz he hlaske.
En aner o-deveus poaniet,
E gorv maro a zo kavet.

Yannig 'zo laket en douar
Gand kalz a zaelou, a hlahar,
Ha war e vez ar Varherien
O-deveus savet eur voundenn ;
Ha bewech ma'z eont d'ar brezel,
Bewech ma tistroont d'ar hastell,
E leveront en eur dremen
Evid o mignon eur bedenn.
Abaoe dre urz an Aotrou
Ez eus laket d'ober bagou,
Evid kas sikour d'an hini
A vefe war var da veuzi.

Markiz Brezal a hirvoude
En e flohig paour pa zoñje,
En e floh pa deue da zoñjal
Hag en e hoar a Gerroual.
« Va hoar gêz, pebez kalonad
Pa glevi eo beuzet da vab !
Pa ouezi ez eo douaret
Heb beza gallet e weled !
Skiltrit, kleier, ha skiltrit splann
Ma root da gleved d'e vamm !
Siwaz ! ne gavin birviken
Eur paotrig koant, drant ha laouen,
Eur paotr eskuit, skañv ha lijer,
Paotr eveziant e peb amzer ;
Biken ne gavin eur flohig
Da blijoud din evel Yannig !
Eur paotr c'hwek, gand an oll karet,
Eur marheg mad en-dije greet ! »

Edo ar vamm baour en he sal
P'erru 'r helou e Kerroual.
« Demad a grean¹² er maner,
Setu deoh, Itron, eul lizer,
Eul lizer digand ar Markiz,
'Zo e Joaiuz-Gward gand e niz. »

¹² grean : ? "a hetan".

Ar ziell du ¹³ dre ma torre
 An Itron gêz liou a jeñche ;
 Hag ar helou trist pa lennas
 Ranna he halon a vennas ;
 Gwiska 'eure eul liou ker gwenn
 Ma soñjet ez ee da dremen.
 Eur pennad mad eo bet mantret
 Heb galloud flach e tu ebed,
 Ken na hellas skuilla daelou
 Da feralzi heh ankeniou.
 Neuze e oa truez he hleved
 Oh en em glemm hag o lared :
 « Yannig, siwaz ! petra 'rin-me ?
 Penaoz hebdout e vevin-me ?
 Peleh emañ, va mab Yannig ?
 Hebdout me a zo reuzeudig.
 Yannig, va mab ! Yann, va mab ker,
 N'az kwelin 'ta mui em heñver !
 Ne glevin 'ta mui da vouez
 Evel ma reen kent pa deues
 En eur gana euz a Vrezal
 D'an abardaez-noz da Gerroual !
 Ne glevin mui trouz da voutou
 O tond en ti dreist an treuzou !
 Diou wech er miz da vihanna
 Az kwelen em hivhenn ama'.
 Hiviziken 'vo en aner
 Az kortozin 'barz em maner ! »
 Setu penaoz ar vamm baour-ze
 Bemdez-houlou a hirvoude ;
 An daelou euz he daoulagad
 A boullade war he dillad.
 Ha da benn an tri bloaz goude
 Mari Rohan c'hoaz a ouele ;
 « Va mab Yannig, peleh emañ ?
 Me n'em-boa ken mab nemedout,
 Ha bremañ, siwaz ! n'em-eus den
 D'am frealzi 'barz en anken !
 Va Doue, petra 'm-boa-me greet
 Da veza 'vel-henn dilezet ?
 Me 'garje gweled an tangwall
 O tevi maner Kerroual ;
 Me a garje koll va oll vad
 Gand ma vije beo beo va mab !
 Pa n'am-bije tan na goulou
 Na tamm da lakaad em genou,
 Pa n'am-bije na ti nag aoz
 Na toenn d'am golo en noz !
 Laouen er mêz me a gouskje

¹³ Ar ziell du : siell war al lizer.

Ma vije beo va mab gane'¹⁴.

¹⁴ gane' : ganen.

Eil kan

AR BALE

IV

Setu ar boultrenn o sevel,
An douar a gren war-dro 'r hastell,
Adaleg dourig Gwennorgant
Bete Beuzid e' leun an hent ;
Ne weler nemed marheien
O vond d'an emgann a-vandenn.
Ne weler penn-da-benn ar hoad
'Med marheien harnezet mad ;
Ha ganto peb a dok houarn
Peb a gleñv¹⁵ dir en o daouarn,
Peb a skoed kevr¹⁶ ruz oh o breh
Peb a hoaf dir oh o hroazleh
War o roñsed dibrou kevr gwenn.
Bridou arhantet en o fenn.
Selled outo 'zo eun dudi
Kement a reont o lugerni ;
An heol warnezo o para
Trelli an daoulagad a ra.

E penn ema 'n Aotrou Rohan,
Hag e vab en tu dehou dezañ :
A-gleiz ema 'n Aotrou Lezwern,
Hemañ eo an eil penntiern.
Goude 'vale Marheg Elorn
Ar banniel gantañ en e zorn.

Petra 'r marheg a welan-me
O vond war gein eun inkane ?
Gand eur hoz gourgleze merglet
Hag eñ 'vel eur houër gwisket.
Gantañ eur wareg, eur pennbaz,
Eur strollad birou oh e skoaz ?
Ar Gouez braz a ya d'an emgann
Dre gemenn an Aotrou Rohan,
Abalamour m'en-deus gwanet
Liez a wech ar Zaozoned.
Ken aliez ha ma kave penn
E waske stard ar varherien,
Ha nikun ne stage dezañ,
Oll o-doa kreñvañ dirazañ.

Ar varherien o-deus mennet
Ma vije 'r Gouez braz harnezet

¹⁵ gleñv : a gleze.

¹⁶ kevr : koueor

Da vond en o mesk d'an argad.
Hirroh eh hallje e galon pad
Hag e lavare 'r Gouez braz
En eur eilpennad e bennbaz :
« Keid ma vo houmañ em daouarn
'M-eus kaver¹⁷ na dir nag houarn :
Gand houmañ, hep hernach ebed,
Me 'dorro d'ar Zaoz e zehed !
Va marh-me 'zo evel eur c'hwil,
E-touez kezeg an dudjentil :
Mez evitañ beza garret berr,
Hemañ 'zo skañv, buan ha taer ;
Pa'z aim da rei d'ar Zaoz e gerh,
N'e' ket va marh-me 'vo war-lerh ! »

V

Marheg Elorn a lavare
E-biou Ker Ruz pa dremene :
« Ha c'hwi ne wel eun toull bennag
A zo ennañ yeot a-stok
Hag en e greiz eur waz dour-red
Gand gwad on tud-ni bet ruziet ?
Er foenneg-se nao forestad¹⁸
O tond d'ar gêr euz ar marhad
O-deus ranket koll o buhez
Taget gand ar Zaoz didruez ;
A zo bet lazet ha draillet
Gand ar Zaozoned villiget !
'Med unan 'hellas en em denn
E-touez ar spern hag ar helenn.
Daouzeg marheg gand o armou,
Kuzet e-doug ar bodennou
A oa aze war o api
Oh o gedal da zistrei.
Evel bleizi war an deñved
Int raktal warnezo lammet,
Mez unan e-touez ar hoad braz
A-dre o skilfou a dehas.
An eiz all a zo bet c'hwiliet,
Hag o horv a-beziou draillet
Ha lezet aze war ar prad
A oa ruz-glaou gand o gwad.
Antronoz vintin o tremen,
An dud a zave bleo o fenn
Hag a zante o gwad o vervi
O weled eur seurt krizderi,
O weled eiz korv dispennet
Evel chatal gand al leoned.

¹⁷ kaver : ezomm.

¹⁸ forestad : eun den o chom en eur forest.

VI

Etre daou edo 'Duk Rohan
Degouezet gand ti al lean,
Eul lean koz abaoe pell
O chom er hoad 'doug eur rohell.
En deiz-se en e beniti
Edo al lean mad o pedi ;
Hag ar stroll p'en-deveus gwelet
War beg e rohell eo savet.
Dirazañ 'r varheien a stoue,
Hag al lean a bede Doue :
« Penntiern braz an tiernez¹⁹
Skuillit, m'ho ped, ho trugarez
War an neb a ya d'ar brezel
Evid savetei Breiz-Izel.
Mil bennoz d'an Argadourien
'Ya da herzel ar waskerien ;
Bennoz Doue da beb marheg,
Benzoz da beb den kaloneg,
O-deus klevet klemmou Breiz
Hag o-deus truez oh an dud keiz.
Bennoz Doue da gement hini
'Ya da stourmad evidom-ni.
Neb a varv o tiwall e vro,
A ya d'an neñvou war eun dro ;
Doue 'ro dezañ e vennoz,
Hag eñ 'loj en e varadoz.
Mil malloz d'ar ouenn villiget
He-deus keid amzer or gwasket ;
Kant ha mil malloz d'an dud kriz
O-deus sunet gwad Arvoriz.
« Me 'wel ar gwad ruz o reded,
Argadourien diharnezet,
Me 'wel marheien e bagou
O stourmad oh ar houagou²⁰ ;
En-dra 'hellont e roeñvont,
Gand kounnar o dent e skrignont,
Ha darn a bleg o fenn gand mez
Kroummet dindan o beah²¹ despez. »

Neuze e tao al lean koz,
Hag an oll da grial bennoz.
Evel ar gliz e miz Mae
A lak pep tra da zevel gae ;
Evel eur barrig glao en hañv
Pe eur horenn heol²² er goañv,

¹⁹ tiernez : priselez (douar eur priñs).

²⁰ houagou : gwagennou.

²¹ beah : leoneg : beh.

²² eur horenn heol : gor an heol.

Evel-se ivez e gomzou
Arent laouen ar halonou.
Ha pa oant diblaset adarre,
An eil d'egile a lavare :
« Ma lavar gwir al lean koz,
E raim foar²³ gand paotred Vro-Zaoz ! »

VII

E-biou Follgoad pa dremene
An Aotrou Rohan a bede :
« Itron Varia ar Follgoad,
Grit ma hello or halon pad²⁴
Grit ma tiwennim²⁵ tro-war-dro ;
Marheien Vro-Zaoz euz or bro ;
Ho-pet truez ouz an Arvoriz,
'Zo flastret gand trubarded kriz.
Mar deuan-me biken d'am hastell
Goude savetei Breiz-Izel,
Eur hloah 'vo savet en ho tour
A vo klavet ahano d'ar mour²⁶
O son da hervel Arvoriz
Da zond d'ar pardon d'hoh iliz ;
A vo klevet ahann a-bell
O tregarni deiz ho kouel. »

VIII

Degouezet e pleg an dachenn
A guz a-dreñv eun uheleñn,
O-deveus savet eun dinell
Evid gortoz eur ar brezel
Hag eur gedour o-deus laket
D'o diwall e-pad o housked.
Lavar din-me, gedour, gedour !
Na te a wel an enebour ?
« Ema an dra 'hell ar Zaozon
O roeñvad war ar mor don,
Hag i o kerhad a beb leh
Bagou da zegas d'Aberwrah.
Me 'wel tregont bag, hag ouspenn
Dirazom e traoñ an dachenn,
War riz an aod ganto staget,
Hag e peb giz oll pourchaset. »
Ha pa deu an noz warnezo
'Lakeont o lien d'o golo,
Nemed c'hweh marheg harnezet
A jom da ziwall ar roñsed.

²³ E raim foar ; E raim o doare gand...

²⁴ ma hello or halon pad : ma vo kennerz en or halonou.

²⁵ ma tiwennim : ma teum a-benn

²⁶ mour : mor (evid ar rim).

IX

Hogen Penngoun ar penntiern
Kelennet gand mouez an ivern
Ne halle kousked beradenn,
Eur gwall youl a oa en e benn.
E varheien a zihunas
Ha d'ar riz ganto e teuas,
Hag e lavare 'n eur hoarzin :
« Deom-ni da denna eun taol fin. »
Setu 'ma tost d'an hanternoz,
Tud ha chatal dastumet kloz ;
Paotred Arvor 'zo kousket c'hwek,
Savom eta war or hezeg
Ha deom ahann en eur vandenn
D'entana dezo o zinenn²⁷
Dalhit eta mad d'hoh hernach,
Ho tir²⁸, ho koafou e poursach²⁹.
Evid ma lazim ar gedour,
'Barz ma tihuno 'n enebour.
Goude, sioulla ma hellim
War an Arvoriz e saillim ;
Braoa taol evid paotred Vreiz
Mond heb goud dare gand ar bleiz !
Koanta maro 'zo war ar bed
Eo mervel diwar greiz kousked !
Penngoun a gomze evel-se
Hag ar heler-noz her bleinie.
Edont tostig da benn o hent,
An disterra trouz ne glevent ;
An êzenn hepken a hweze,
Ha gedour Arvor a rohe,
Ar gedou ne ree mann ebed,
Hogen Doue n'oa ket kousket,
Evid beza teñval an noz
E wele sklêr petra 'ree 'r Zaoz.
Hennez ne vez ket pell nehet,
O tibuna 'r gudenn rouestlet,
Eur blouzenn etre e zaouarn
A dalv ken ha dir hag houarn.
Pa zao e vreh oll-gallouduz
E flastr ar pennou orgouilluz,
Hag e lak da vond e maged,
An taoliou kaerra 'reer er bed.
Eur hi a zegas da skrabad
'Doug an dinell, ha da chilpad,
Hag ar gedour o tihuna
A zao en eul lamm en e za'.

²⁷ o zinenn : o zinell (evid ar rim).

²⁸ tir :klezeou e dir.

²⁹ e poursach : dibaouez.

Pebez enkreuz ha pebez spont,
Pa wel eur seurt bandenn,
Hag eñ da grial a-bouez-penn :
« Ar Zaoz ! ar Zaoz ! War-zao ! War-zao !
Buan 'ta ! buan ! me 'wel eiz... nao...
Daouzeg... ugent... Me n'oun ket ped
O tond warnom gand o roñsed ! »
N'oa ket peurlavaret e her,
Na, 'doa 'n Arvoriz taer ha taer
O harnach oll ganto sterniet
Ha war gein o hezeg pignet.
Dre ma komañsont tousmahad
Hag o hernez da stirlinkad,
Dre ma kleo trouz treid o roñsed
Ar Zaoz a wel ema kollet,
Hag i d'an daou lamm-ruz en-dro
Ken a gren an douar ganto.

Souden marheien Vreiz-Izel
A zo eet pell dioh o zinell ;
Ha mar vijent-i bet lezet
War ar Zaoz diohtu 'oant lammet.
P'o gwel evel-se e kounnar
An Aotrou Rohan a lavar :
« Argadourien, tud kaloneg,
Fae 've ganen larkoh redeg
War-lerh kaillerien³⁰, sklissou³¹ fall,
War-lerh tud diwir, displeal,
A ra 'vel ar bleiz d'an deñved
Pa gred e vez an dud kousket,
A deu dre laer da glask tagi
Ar re n'hellont ket da drehi. »
Mez ni a zo marheien wirion
Ha rag or skeud n'on-eus ket aon,
N'e' ket red deom stourmad en noz
Evid kempenn paotred Vro-Zaoz.
Pa vem zoken ganto trehet
O brud vad ganto ne day ket.
Da zao-heol warhoaz beure,
Ar hann digeri a dlee,
Ar Zaoz 'eneb e her 'zo eet
Mez evidom-ni ne daim ket.
Marheg a Vreiz-Izel biskoaz
'Eneb e her touet ne deas³².
Warhoaz vintin ar Vretoned
A zizkouezo d'ar Zaozoned
Penaos heb mond morse dre laer

³⁰ kaillerien : kailled.

³¹ sklissou : tud gand sklis.

³² ne deas : n'ez eas.

E reont a-wechou taoliou kaer. »

Pa'z eent en-dro tram' an dinell
E lavare Polig Gwendel :
« Doganed saoz ! lern diskrognet !
C'hwi 'grede n'ho-pije kavet
Nemed yer en on tinell-ni,
Kudoned don³³ hag houldi ;
Paket hoh-eus eur zouezenn
Am-eus chas droug ha Marheien
Ar re³⁴, paneved 'r penntiern
O-doa ho tilostet, bandenn lern !
Ya, ma karje 'n Aotrou Rohan
Beza lezet ar varheien-mañ,
'Barz ma vije tarzet an deiz
C'hwi 'poa tañvet dir paotred Vreiz,
C'hwi 'oa laket da vuzula
Gand ho keinou an dachenn-ma' !

³³ don : abaf.

³⁴ Ar re : Pere, er skrid orin.

Trede kan

AR STOURMAD

pe An Emgann

X

Antronoz, pa zavas an heol
Edo peb marheg en e reol,
Re 'n Arvor ha re 'n Enezenn³⁵
Eur rumm e pep penn an dachenn,
O hortoz ar herniel gwinal³⁶
Da zoni an urz sa stourmal.

E-touez ar varheien estren`
Eur hrenn-marheg war eur marh gwenn
Eur glazard³⁷ war-dro triweh vloaz,
Nag emgann ne welas biskoaz,
Dre ma wele an Arvoriz
A droe oh e genvroiz,
Da hoarzin ha da arieza³⁸,
Da lakaad e varh da vresa³⁹.
« Diwall, labousig war ar skourr,
Diwall mad eh an harzeour.
re, diouz vintin, neb a hoarzas,
'Barz an noz aliez a ouelas ! »
Ar Gouez braz oh e weled,
Gand kounnar en-deuz lavaret :
« Setu a-hont eru matheg gwall hae⁴⁰,
Me 'gred warnon e ra fae,
Dre 'n abeg 'm-eus ganen dillad,
Marh ha sterniou eur houëriad.
Gortoz, bugel m'az tizono.
Souden hep kavell te 'gousko,
Ha n'e' ket beg va birou fall
Ma'z lakay d'ober eur c'hoaz all. »
E wareg 'stign a-ziantell,
Eur bir a wint 'vel an avel,
Hag a ya reud en eur voudal
A-dreuz a gern beteg e dal,
A droh dezañ en eun taol krenn
E hoarz, e vuhez hag e empenn ;
War e benn d'an douar eo kouezet,
E varh gand ar gwad 'zo ruziet.

³⁵ Enezenn : Bro-Zaoz.

³⁶ gwinal : ? . "soni".

³⁷ Eur glazard ; Eur hrennard.

³⁸ arieza : farsal.

³⁹ da vresa : da garnata.

⁴⁰ hae : gë.

Eno neuze e sao 'breta
Den ne jom mui da varhata,
An eil rumm a stag d'egile
En eur youhal, a-briz buhe'.
En em stleja 'ra 'r Vretoned,
'Vid pilad war ar Zaozoned,
Hag ar Zaoz⁴¹ 'vid en em zivenn
En em zastum en eur vandenn,
En o raog bized o goafou
Evid herpel oh an taoliou.
E vên ez int en em stardet
Re 'n Arvor a zalho bepred ;
'Vel ar hounmoul pa vez arne
E ya 'eneb an avel greñv,
Pe war an dour, an aour-yeotenn
A ya war-zu e eienenn.

Marheg Gournadeh a grene,
Ha Pennfeunteun her goapae :
« Petra n'ah-eus-te degaset
Ganez da vantell ler bleveg !
Me 'gred eo sin euz eur hlañvour
Kaoud riou dirag an enebour ! »
« N'e' ket gand anoued e krenan,
Gand enkreiz kennebeud ne ran ;
Mar dom oll klañv evel don-me,
Ar Zaoz a droy kein hebdale.
Bremañ zouden 'vezo gwelet
Piou a vezo 'r yac'ha paotred.
Setu-eñ o vond war e giz
Eun nebeud da gemered tiz
Ha prim evel eul luhedenn
En em strink e-kreiz ar vandenn.
Ne weled a bep tu dezañ
Nemed marheien o kouezañ
Evel ma kouedz yeot a-steiou⁴²
Gand eur falher en e vreou⁴³.
Hogen ne deo ket eet a-bell.
Eun taol goaf dindan e gazell
En-deus dezañ e vreh sonnet
Hag etre treid e varh pilet.

XI

Ne gleved mui nemed taoliou,
Ha tousmah ha youhadennou,
An dir, an harnach o strakal
Hag ar hezeg o hourichal,

⁴¹ Zaoz : ar Zaozon.

⁴² steiou : strewadou.

⁴³ en e vreou : pa dremen.

An dachenn o tregerni
Gand an dispah a reed enni.
Klev⁴⁴ ha goaf an Aotrou Rohan
'Zo bet ankou meur a unan.
E vab ker gwaz hag eñ pe waz
A ra war ar Zaoz distruj braz.

Pa wele Penngoun kement-se,
War-zu ar penn-tiern e kerze
Hag a bep tu dre ma tremen
E pil Arvoriz 'vel kelien.
Itron yaouank a Lezereg,
Gouela a rit, gouela doureg,
Ne de' ket heb abeg, siwaz,
Intañvez oh 'barz penn ar bloaz !
E miz Genver dispartiet !
Eun atol kleze digand Penngoun
'Deus treuzet d'ho pried e galon !
Ha c'hwi, Jenovefa Kergoad,
C'hwi hoh-eus ivez kalonad ;
C'hwi hoh-eus kollet ho mab ker,
Gwalenn hp kozni, ho pennher,
Am-eus gweelt war an dachenn
Astdennet war goenn⁴⁵ e grohenn.

Etre Penngoun ha Duk Rohan
N'e' ket padet hir an emgann.
Penngoun 'zo bet diharnezet,
E gleze dezañ bruzunet,
E hoaf strinket euz e zaouarn ;
E varh 'zo lijer, rag anez
En-doa kollet sur e vuhez.
Morleg, deut da rei dezañ skoazell
En-deus ranket rei e vantell.
'Vel eun den diboell e saille,
War zibrada gantañ e gleze,
Gand eun taol eo bet diskaret,
Ha breset gand treid ar roñsed.

'N Aotrou Lezwern 'zo bet war var,
Diskaret eo bet d'an douar,
Mez o koueza en-deus pilet
Ar Zaoz en-doa e ziskaret.
Setu-i o-daou kroh-ha-krog,
D'ar penn, d'ar bleo, a zach, a stok,
'Vel daou vaout war eul letonenn
En em dourt ken na strak o fenn,
Dispartiet ma ne vezont,

⁴⁴ Klev : kleze

⁴⁵ goenn : ? gein (?)

Ken na varv unan 'n em gannont.
 Hogen bleiz tramor ar hreñva
 A dap al Lezwern dindanna ;
 Eñ, lakaad eun dorn war e chouk
 Hag eun dorn all war e houzoug ;
 Al Lezwern kêz a doulonke,
 E zaoulagad a zifuke :
 Mouget 'vije bet a-dra-zur
 Panefe Marheg Keranfur ;
 Pa her gwel dare da vervel
 Hemañ ker buan hag an avel,
 A lamm war ar Zaoz didruez
 Hag a sank e hoaf en e lez.
 Ae Zaoz 'vel eur hi kounnaret
 En eur yudal a zo lammet
 Gand e gostez, gand ar gouli
 O klask tenna 'r gwad anezañ⁴⁶,
 'Klask stanka 'r gwad 'r hlao anezañ⁴⁷,
 Klask stanka 'r gwad a ziruille
 'Vel eur stivell dioh e goste'.
 Setu e vizaj o stena,
 E zaoulagad o kohenna,
 Souden eo en em astennet
 Ha maro mik eo eno chomet.

Izelloh e traoñ an dachenn
 Ez oa c'hoaz gwasoh abadenn.
 Ar Gouez braz n'eus nemetañ
 Ha tregont Saoz en-dro dezañ,
 Seizet warnezañ a bep tu
 Ha lazet dezañ e varh du ;
 E hourgleze a zo torret
 Mez e bennbaz en-deus dalhet,
 Eun den a ziskar beb bazad.
 Marheg ebed ne hell tostaad,
 Evel eun den dall e tarho
 A-zehou, a-gleiz, ha tro-war-dro,
 Diwar ar penn, diwar ar hern
 Ken na vruzun dezo o eskern.
 Oll en-dije o hempennet
 Gand e bennbaz heb mar ebed
 Ma vijent bet en-dro deza'
 Chomet pell da glask e dumpa.

XII

Mez etre-daou ar Vretoned
 O-doa lazet kalz Saozoned,
 Hag ar Zaoz prim a rank riñsa

⁴⁶ anezañ : anezi, er skrid orin. Evid ar rim. Gourel eo "gouli".

⁴⁷ anezañ : evel er werzenn a-uz.

An dachenn hag en em denna.
 En eun taol krenn e trojont oll
 War-zu an aod evel a-goll,
 Ha Gouez braz a oe kentiz
 Lamet diwarnañ ar seiziz.
 Toullet 'oa dezañ e vorzed
 E gorv bloñset ha bronduet,
 Ha ne oa mui e doare
 Da heuilla 'r Zaoz dre ma tehe.
 O weled se, gand e gounnar,
 Gouez a stoke e dreid en douar,
 Hag a grie war-bouez e benn :
 « Darhoit warno 'ta, Marheien !
 Dalhit mad, Breiziz, kreñvoh c'hoaz !
 Darhoit atao ! c'hoaz, gwasoh-gwaz !
 Ahanta, Saoz ! Ahann, tud fall !
 Laboused noz, tud displeal !
 Tehed a rez, Saoz milliget !
 Aon ah-eus da veza gwanet !
 Gortoz 'ta, c'hoaz, lorgnez tramor,
 Ma vo rouez an dud en Arvor !
 Eur marheg mad out, eme 'r brud.
 Ya, pa gavez kousket an dud !
 N'e' ket red beza er zivorfil
 'Vid da lakaad oh an ispill ;
 Da vond a-dreñv out eur hounnar⁴⁸ !
 Da vond a-raog n'out ket re dear⁴⁹ !
 Mad e' deoh eo prest ho pagou,
 Panefe ze oh ho seuliou
 'Vije kouezet hirio truez :
 C'hwi 'poa paeet ho fallagriez.

XIII

An noz diaraog ar brezel,
 'N-oa ket kousket oll Breiz-Izel,
 An dud a oa meurbed nehet
 Na vije Arvoriz trehet.
 « Siwaz, mar kollom anezo,
 Ema greet he zaol gand or bro ;
 N'on-eus pell zo nemed anken,
 Gwallwasket om bet beteg-henn,
 Ha neuze 'vezim gwasket c'hoaz
 Gand ar Zaoz, gwaz evid biskoaz.
 Oll ez ay ganto on danvez
 Ha douetuz-braz or buhez. »
 Setu dre ali 'r garteriz
 An dibab euz ar yaouankiz
 En em lak en hent a-vandenn

⁴⁸ Da vond a-dreñv out eur hounnar : da vond a-dreñv ez out eur maill.

⁴⁹ dear : leo, eg evdi ar rim : daer.

Heb goud dare d'ar varherien,
Evdi lammed war re tramor.
Mar vijent treh da re 'n Arvor,
Hag o hontregn⁵⁰ en eun dro grenn
Da vond raktal d'o enezenn.
An noz a dregerne spontuz
Gand ar boudadennou⁵¹ skiltruz
A gleved oll dre Vreiz-Izel,
Yaouankiz oh en em hervel.
Ker skrijuz-se ne oe biskoaz
Klevet an hu er hoajou braz.
Darn a zouge en o daouarn
Benviachou, feier houarn.
Darn all hepken pennou-bizier
Ha filzier-med 'vid klezeier ;
Pep hini 'n-doa kaset ganta'
Eur benveg mad d'en em ganna.
Ere Lanniliz ha Follgoed
Eno int en em zastumet.
Ha pa houlaouas an deiz
'Oent bleniet gand ar garteriz
Da vond a-dreuz d'an Arberwrah
Heb ober dale e neb leh.
Dre ma tremenent ar mêziou
E-leh n'oa ket eet ar helou
Euz an taol a dleent da ober
E lakent ar spont er harter
O weled ouspenn eiz-kant den
O tond a-bell en eur vandenn,
An dud keiz a zoñje dezo
Ez eed d'o lakaad d'ar maro ;
Goude-ze p'o anavezant
En em lakeent ganto en hent.
Setu penaoz 'vezer aoniet
Pa zao arnev diou ar Hevred ;
Ar houlmoul savet bern-war-vern,
Darn anezo du ken a lugern
Talmou kurun ha flammou tan
A lak da grena pep unan.
Mez oh an tann dre ma tosta
An arnev a zeu da freuza,
Ha souden eru barrig glao puill
A lamm an dud euz a drubuill.
O hlebia 'n douar dizehet
Hag o renta laouen an ed.
Evel-se goude an enkreuz
E teu er galon levezant.

⁵⁰ hontregn : galleg. redia.

⁵¹ boudadennou : soniou ar horn-boud.

Degouezet war eun uhelenn
A leh ma weled an dachenn,
O halon a drid gand dudi
O selled oh eur seurt c'hoari.
'Vel eun hed-gwenan o voda
Edo 'r Zaozon paravia
War ar riz o klask goud piou
A bignje kenta er bagou.
Kement ez oa foulgas ganto
Ma troe ar bagou dindanno,
Ha kalz anezo gand o fres
A ruille 'n dour ha war an trêz.
Ne gleved mui war ar mor don
Nemed grozmol gand ar Zaozon.
Leoudouet, gwall bedennou,
Ha freuz ha trouz ar roeñvou.
Gand mall pellaad dioh Breiz-Izel
Pdeb bag a ya en he avel
War ar mor braz da vrañsellad
Hag ouz an tarziou da stourmad.

Tud yaouank Arvor pa welont
D'ar gêr timad e tistroont
Da denna o zud a anken
O kas eur helou kel laouen.
« Savit ho pennou, Breizadiz,
Ema tehet kuit an dud kriz.
Breiziz, savit uhel ho penn,
Ema diouennet an estren !
Emaint en o bagou pignet :
Hogen oll ne dint ket tehet.
Ker stank eo e mêz Sant Anton
Ar re varo war al leton
'Vel pa ziskennas eun devez
Ar vosenn wenn e Montroulez ;
Pa oe gwelet eun dimezell
E kreiz-kêr eun devez gouel,
Eun dimezell gwisket e gwenn
En he dorn ganti eur walenn,
Eun dimezell gand eul lost pesk
(Doue or miro dioh he arves !)
Ha kement ma selle outo,
Ma vize⁵² he gwalenn dezo.
A-bell ne hallent mui moned
Na doant gand ar maro skoet.
Siwaz ! neuze 'oa eun druez
Beza e kêr Vontroulez,
Ne weled dre an tachennou
Nemed re varo a-stegnou ;

⁵² vize : verb "biza".

En tiez 'oa nemed gouelvan,
Nemed tud war o zremenvan ;
Nemed ar re⁵³ a oa prenet
Gand ar vosenn goullonderet,
Setu penaoz ema hirio
E Sant Anton ar re varo.
Livirit an *De profundis*,
Lod anezo 'zo Arvoriz.

Breiziz, list bremañ ho taelou,
Hoh enkreiz, hoh huanadou,
Klaskit ho kiskamantchou kaer,
Ho tillad voulouz ha mezer
Ho seizennou, ho tantelez,
Ho karkaniou arhant alaouret,
Da vond da bardon ar Follgoet
Da drugarekaad ar Werhez
He-deus selaouet or mouez.
Eno 'welot ar Varheien,
En distro euz an abadenn
Deut da zeveni o gouestlou
Da di Rouanez an Neñvou.
Ae Werhez a welot douget
Gand daou varheg 'tro bourk Follgoet,
Gand an daou argadour c'hweka
A zispak kleze er vro-ma',
An daou o-deus e Sant Anton
Douaret ar vuia Zaozon ;
Hag eun all a zougo 'r banniel
Dre m'eo bet war var er brezel.

⁵³ ar re : an tiez.

Pevare kan

AN DISTRO

XIV

Brao 'oa gweled ar Varheien
Skignet dre vêziou Kerodren
Oh ebatal, o trompillad
Goude distrei euz an argad.
Mez ar pardaez dre ma tostae
An amzer en em holoe ;
Hag e lare marheg Derien,
Deom-ni ahann, argadourien,
Deom-ni ahann da glask disglao,
Hag eur gwall var amzer a zao.
An avel spontuz a zourre
Hag en dioukouarn a yude,
Beb an amzer e skoe taoliou
Hag a groze evel tennou.
Eur skrij 'oa selled oh ar mor
Oh eonenna gand fulor ;
Gand an tourmant ; ar mordarziou
A zave 'vek kern menezioù ;
Ar houagou⁵⁴, en o hounnar
A zilamme war-zu 'n douar,
Hag a strinke an eonenn
Dreist ar herreg a-zioh or penn.
Ar vri gand al lamm a grene
Hag ar herreg a horjelle.
An dour a venn o dibrada
Kement ez oa kas warneza' ;
Hag ar mordrouz a oa ker kreñv⁵⁵
Ma trubuille neb her hleve,
Ouspenn peder leo tro-war-dro
E tregerne gantañ ar vro.
Eul lestr a weljom euz a-bell
Hag hen kannet gand an avel ;
Stlapet e oe ha distlapet
Ha goude war eur roh taolet ;
Broustet e oueliou, e verniou,
Hanter-zigor ez gostezenn ;
Kordenn ar vag vihan a dorras
Ha d'an aod ar mor he stlapas.
Gand an houlio-mor degaset
Ouz ar herreg 'oe bruzunet ;
O vond war o hiz an tarziou
A zache ganto ar skillou
Hag o strinka a-nevez flamm,

⁵⁴ Ar houagou : ar gwagennou

⁵⁵ kreñv : distaget "kré"

Ken na doant laket e mil damm.

Ar barr-amzer dre ma strake,
Marheg Kerlaz a lavare :
« C’hwez ‘ta, avel, war ar mor don,
Ha kas d’ar goueled ar Zaozon !
Taol i d’ar pesked da zebri,
Ne vo ano anezo mui ! »
Kerlaz a gomze evel-se
Hag ar varherien a hoarze.
An Aotrou Rohan n’her hlevas,
E-leh c’hoarzin her gourdrouzas.
« Tao, Kerlaz, te ah-eus pehet,
Na houlen ket na vint beuzet,
Goulenn hepken ne zistroint mui
D’ober distruj en or bro-ni.
Eun deiz gand Doue, barnet e vint,
Dioh m’o-devo greet e kavint. »

XV

Kar d’an Arvoriz ne vije
Ar galon an hini ⁵⁶ne hoarzje,
Neb ne dridje ket e galon
E Follgoet derhent ar pardon ;
O weled marherien or bro
Trehet ar Zaozoned ganto
O tond d’ar Follgoet a-vandenn
Eur banniel uhel en o fenn,
Hag e kanent oll a eur vouez :
« Mari, c’hwi eo on Rouanez,
C’hwi ‘ro bepred deom-ni skoazell,
C’hwi eo a zivenn Breiz-Izel ;
Ha c’hwi ne zilezit nepred
An neb ouzoh en em erbed. »
Kaer ‘oa gweled dre ‘n oll hentchou
Tud oh erruoud a-vandennou
‘Tond da bardona d’ar Follgoet
Hga i oll war gorv o roched,
Diskabell kaer ha diarhen,
En o dorn peb a wialenn ;
A gement korn a zo e Breiz
‘Teue pardonerien leun a feiz•
Hag oll e kanent meuleudi,
D’an Itron ar Werhez Vari.
Kaer ‘oa gweled deiz ar pardon
Ar Werhez e prosesion,
Ha war he fenn eur gurunenn,
Greet gand perlez hag aour melen ;
Hag hi douget gand al Lezwern

⁵⁶ an hini : pehini, er skrid orin.

Ha mab-hena ar Penntiern,
E oa ganto peb a zae wenn
War o hroazlez peb a zeizenn
Peb a zeizenn hlaz alaouret
Ha peb a garkan arhantet,
Peb a gleze ouz o hostez,
War o fenn peb a harlantez.
Ar Gouez braz a valee seder
Gand ar banniel dre al leurgêr,
En-dro dezañ eur zeizenn wenn
Hag eun tok houarn war e benn ;
Ha dre ma'z eent, eet tro Follgoet
Mouez an Arvoriz a gleved :
« Bennoz deoh, Itron ha Gwerhez,
Skoazell Vreiz hag on Rouanez ! »